



DISPUT

ENTRE AR BLËI HAC AL LAER.

Var tōn : Chanson ar C'hase.



BRetonet, me ho supli, tostait da glêvet,
Ur chanson hac un disput a neve gomposet,
Var sujet daou adversour o c'hautren en ur c'hoat,
Arrêtet da ziscuiza en dīfin o marc'hat.

Evit rēi sclēr da gompren, e zint daou bot subtil,
O hanoyou da gompren d'an oll a so facil :
Guillerm ar Blei eo hano unan demeus anē,
Al Laer, pe an domager a rēr deus eguile.

Arrêtit, asistantet, ~~un~~ nebeut da zelaou.

Hac e clêfot ar c'honcour hac ar finessaou
 Pere o deus invantet er plac-mâ entrezè ;
 Arrêtit da ziscuisa, da c'hortos mont arre.

Al Laer.

Petra a glesques amâ d'ar c'houl-ma eus an nos ?
 Brema e tiefca beza peb loën en e repos :
 Spouronet e'heus a'chanon o velet an danvad ;
 Me zonje e voa êru an diaoul d'am c'herc'hat ,

Ar Blei.

Te a vel bremâ patant, inoçant mic'hiec ,
 Pa ma aze es qichen, petra neus da spontet ?
 Ha mar doude spouronet o velet an danvad ,
 Me a so qen estonet e compren es paqat.

Al Laer.

Ne qet ar boan dit, Guillou, dont d'am zizeblijan ;
 Me meus ama un tam coat, ha mar en dispaqan ,
 A rei dit en em glenqa, pe me a so tromplet ,
 Ha partia gant da loën, pa c'heus-an bet tapet.

Ar Blei.

Me a meus bet peder gar evit en em zifen ,
 Ha c'hoas mar bézan foulet e tiscuelin ouspen ;
 Me zispaqo ur rastel , ha mar ti crog ennout .
 A rai dit tranquiliza ha monet gant da rout.

Al Laer.

Hola! arrêtoomp brema, ha chanchomp a langach,
 Pa ê guir e zomp daou botr o tibapr hor partach;
 E lec'h dont d'en em ganna, bezomp camaradou;
 Trugarecaomp Doue, pa zè bet mat hon tro.

Ar Blei.

Me meus bet poan ha fatic o tout betec amân,
 A dreus dre ar goaremou, ar c'hleuyou hucellan;
 P'am bezo gret d'al loën-mâ divisqa e jupen
 E rin ur pred excelant gantan qic hac esqern.

Al Laer.

Te n'en dout qet difficil; te zêbr ar c'hic en cri,
 Ha me, qent m'am bo bara a renqo vandanji,
 Ar pez a meus qemeret divar goust va nessa,
 Ha va brassa camarad a ell va zrahissa.

Ar Blei.

Ganeme sur va unan eo bet eruet qementse:
 Un nosvez dreist ar re-al e voan êt d'ar chasse,
 Ha p'am boa sammet va bec'h hac e rentet er c'hoat,
 E voen privet ha cannet vit ma zrugarecat.

Al Laer,

Qementse, va fot Guillou, n'en dê qet padet pell,
 Goude es poa liberte adare da dec'hel,

Ha me, m'ar ben prisoniet, a vezo condaonet
 Evit ur pemp pe c'houec'h vloas, hep beza respetet,

Ar Blei.

Qent evit dispartia, mar qeres, sent ouzin ;
 Cede ama un avis, qemer-hi diganen :
 Chanch a etat a dlees, ha qemer un all vell,
 An honnestis ar gouella vit cat peoc'h da vervel.


Pa voant en creis o discours e zeus bet tremenet
 Ur jandarm a biou de, hac en deus o spontet ;
 E armou a luguerne, hac ar loar a voa sclêr,
 Hac a ras dê partial pepini en e affer.

An den-ma voe estonet o velet o zamou
 Placet gante var ar c'hleu, ha savet ar c'hernou ;
 An dourni en dro dezan a rent o partia,
 En laque da zonzal en e heur diveza.

Commanç a ra da grial ha da douet toue,
 Ha da lampat er vouillen, ne vouye pellec'h yê,
 Bete banden e vragou, dre an dour hac ar fanq,
 Evel un den en dije collet e zantimant,

Pa zantjont e voa pellêt, e tistroont en dro
 Etreze hac ar plaç-mâ, da zama o behiou ;
 Gant calz eus a blijadur ez int êt en o rout,
 Cetu deut o zro da vat, goude sonjal coll tout.

An hini en deus composet an disput a neve,
 A gustum, qent finissa, laret a belec'h ve :
 Yan ar Guen eo e hano, domicil a Bleuyel,
 Ha natif a Plougrescant evit explica vel.



CH AN S O N,
 COMPOSET A NEVEZ
 VAR SUJET DAOU ZEN YAOUANC.

Var un ton nevez.

ER bêvar a C'henveur, er bloa pemp-varnuguent,
 E rimàn ur Chanson, evit rêt da entent,
 Demeus un disparti entre daou zen yaouanq
 Pere zo acuzet dre un tol venjamant.

N'en deus nemeur a dud ebars en terrouer

N'ellont beza tromplet ur veach an amzer ,
 Dre zupliliteou ha tolliou trahison :
 Na ellit get fizia en ho prassa mignon.

Bremàn er c'houelliou, gant ar varichalet ,
 E forjer contellou, ha din ne blijont get ,
 Hac a droc'h-en daou du, pe a dro gant peb sort avel :
 Pellaomp dioute, hep donet d'o henvel.

Ha credomp e hellont beza guel benviou ,
 Rac ous o heuill e ma an ol drahizonou ;
 Ebars en ho presanç e viont amiabl ,
 Pledi a rêi ganec'h, leret drouc, leret vat.

Vel ma trofet ho qein, e teuy ar c'hontellou
 Da labourat ractal dre o finesseou ;
 Hac e viot leget qer munut hac ar bren
 A ven goude beza tremenet ar veguen.

Ar Goas.

Salud dec'h, merc'h yaouanç, eru on hep apel,
 C'houi am disearo prest, pe a deuy d'am zevel,
 Mar ho pe ar vadelez dā zisclèry dirazon
 Penos on acuzet, ma rin va excuzou.

Ar Plac'h.

A zisclèry dirazoc'h n'em eus ezom abet,
 Gout ouzoc'h coulz ha me, da betra oc'h qiriec ;

Gout ha c'houi ve charmet deus un tol ger nezus
Hac a rit em andret hep beza re glorius.

Ar Goas.

Dont a ra em memor, p'o clevan o prezeg,
Ar fêçon nia c'houi beza disoblijet;
Mar en deut da ober an amant honorabl,
Mar plic'h ganec'h beza em andret favorabl.

Ha caout ar vadelez da zicta an amzer,
Ha me rei d'ho sicour da evessât ar guer,
Hac a deuy da zressa, mar am eus netra drouc grêt,
A guement o crae enep fêçon contristet.

Ar Plac'h.

Me a velo, emei, ebars en b'êr amzer,
Ha c'houi oc'h eus design da veza gedisser,
Mar bec'h fidel d'ar propos a bronocit bremâ,
Ne zeufomp qet buan d'en em dispartia.

Ar Goas.

Va benediction var ur seurt femelen,
Pini so contant da zont en ber dermen
Dre gomzou admirabl da rei soulajamant
D'eur paour qez desolet en e afflijamant.

Qent evit finissa, selaouit, tud yaouanq,
Ar propos a roan da avertissamant,

Evit continui an amitie barfet,
Ha tremen ho puez gant henor ha respet.

Pa zeuyo ar guel deod da zroug comz var ho stat,
Stoufit o tiou-scouarn, serrit ho taoulagat,
Ha deut d'e chasseal evel ur c'hi arrajet,
Pe o treino gantan en laç an drouc-speret.

An hini en deus grêt ar ganouen neve,
A rai e imprima un neubeut goudeuse,
Hac he distribuo e touez e vignonet
Gant calz a blijadur : Yan ar Guen eo hanvet.

F I N.



E Montroulez, e ti LÉDAN, Imp. e traon ru ar Yur.